

ENTRETIEN

ETRE

UN MISSIONNER

H A C

UN TOUEUR

DOUE.



E QUEMPER,
Gant SIMON-MARI PERIER, Im-
primer ha Librer.

Gant Permission.

ENTRADA

1813

DE LA

CIUDAD

DE

BOGOTA

1813


ENCUENTRO

DE LOS

SEÑORES

FRANCISCO

DE



ENTRETIEN

*Etre un Missioner hac un
Toüeur Douc.*

An Toüeur.

B Onjour, va Zat, dre ma Feis,
Joa bras amboa pa o clevis
En de all ebars er gador
O presec evel un Doctor
Enep an dançou milliguet :
Me gare e vent et gant an drouc-
speret
Dancereset ha dancierien,
Ha var o lerc'h ar sonnerien.

Ar Missioner.

Mar continuet da douët
Var o lerc'h c'hui allo monet.

An Toüeur.

Ya mill guech e lavaran,
Me gare e couesse an tan,

Hac ar gurun tout d'o foueltra
Evit ho dançou finista.
Cart mil malos a roan dezo ,
Rac collet eo ar bet ganto.

Ar Missioner.

Coll a rit ivez oc'h ene
Oc'h ober an oll leou se.

An Touneur.

Ur verc'h ameus a voa plac'h fur,
A roe bepret din pligeadur,
Nemet abaoe ma-tarampret
An ebatou-se milliguet.
Me lavar deoc'h ar virionez,
Lamet a ra evel un heifez,
Ne zalc'h quet ur momet en ti;
Pa glef ar Biniou o soni.
Pardō, mar plich gueneoc'h, va zat,
Pedet emeus mil guech erfat
Ma zai gant quellies diaoullou
Evel a rai a lam en dançou.

Ar Missioner.

Quellies le a brononcit,
E hent an Ifern e lamit.
Horrol ameus oc'h o cleyet,

5

Finisset, pe me ya da dec'hct.

An Touneur.

Mar plich gueneoc'h, arretit,
Ha var an hent mat hon liquit,
O tisqueus deomp ar guir voyen
Da chench buhez dre ho quelen.

Ar Missioner.

C'hui glevas eta va Sermon
En de all ebars er Pardon ?
Em prezeguen a me doüas ?

An Touneur.

Non pas sur ; pe, den n'o clevas.

Ar Missioner.

Ha coufcoude e voac'h touchet.

An Touneur.

Va merc'h ivez he deus renoncet
Hervez ma lavar ; d'an dançou,
Quen touchet e voa dre ho comfou.

Ar Missioner.

Ne de quet ret eta toüet
Evit convertissa ar bet ?
Liquit evez oc'h quement-man,
Hac o pezit coun anezan.
Pa douot evel Sarazin

Casset e viot d'ar Midicin ;
 Da veza pare da guenta
 Eus al leou-se horripla ,
 Pe clevet a reot lavaret.
 Midicin pa veot pareet
 C'hui a ra guell ho quentellou ;
 Ha remet d'hon oli clenvejou.

An Toueur.

Ha c'hui gred , va Zat e pec'han
 Dre ar c'homsou a lavaran ,
 Ne de quet ur pec'het marvel
 Da vuia tout eo veniel.

Ar Missioner.

Rei ar re all d'an drouc speret ,
 Ne gredit que e ve pec'het ?
 Ur pec'het eo a so marvel
 Dre e natur hac e vatiel ;
 Petra illit desirout goas
 Evel d'an Ifern tout o c'hass' ?
 Pa vint , ma map , eno renter
 N'en deus mui da nicun remed.

An Toueur.

Ne glascan nemet o spona ,
 Hac o laquat var ar guella.

Ar Missioner.

Var ar goassa en em liquit,
 Al leou-se fall pa brononcit;
 Ha ma na gridit quet din-me
 Interrogit var quement-se
 Quement Belec so e Breis,
 Ha quement den so a Ilis,
 Tout de memes e livirint,
 Pe cals tromplet sur e vezint.

An Toueur.

M'ho cred, va Zar, avoalc'h oc'h
 hunan,
 Ha ne maon quet hirio e poan
 Da glasq un all a disqueuse
 Penaus e tlean chench va buhe.
 M'emcus ho clever ur C'horais
 Pa bresgac'h en hon Ilis
 Ar c'haëra a so e Querne:
 Mar de necesser, m'en touë.

Ar Missioner.

Perac e fell deoc'h-u touët
 Pa ne d'oc'h quet difasiet?
 Chetu ho coall accustomanç
 Ur pec'het sur evel an danç.

An Touneur.

Pardon c'hoas evit ar veich man ;
 Coufcoude , va Zat , pa songean,
 Me ne ran drouc da zen ebet
 Evel-se pa zeuan da doüet.

Ar Missioner.

Mar ho pise touët Doue
 Ur pec'het e voa quement-se.

An Touneur.

Couls eo deoc'h eta lavaret
 E ra an dut oll ur pec'het ,
 Pe guir , pe gaou a leveront ,
 Chetu ar pez ne ententont.

Ar Missioner.

Entent a reot , mar celaouët.

An Touneur.

Queit ha ma querot , commancit.

Ar Missioner.

Mæs liquit evez na doüot ,
 Din-me varlerc'h pa respontot ,
 Pe me ya buan d'ho quitat.

An Touneur.

Ne reot quet quement-se , va Zat,
 Continuit ho conferanç ,

Me celaouo quent e filanç.

Ar Missioner.

Da guenta ezeus ur pec'het
Pa zeuer e gaou da douët.
Histor an tri banne Goat,
Ha ne ouzoc'h quet erfat ?

An Touennr.

An Imach memes a velis
Neus quet pell ebars en Ilis
Pa voan en de all e Quemper
N'oun dare evit pe after.

Ar Missioner.

Ar peza yan da lavaret
Ne gredan quet ho pe clevet.
E Jerusalem e voa ur Sant
Un Escop a vertus constant,
Narcissus e voa e hano,
Accuset gant tri den garo
Gant tri dest pere a doüas
Ar peza ganto a erruas.
Ma ne de quet guir, eme unan,
Ar peza hirio a lavaran,
Goulen a ran da veza deuet
An cil, ha me ma vin mouguet

Dre ur c'hlenvet an horripla
 Evit erfat va funiffa.
 Ha me a bed eme an trede
 Da veza dall buan hep dale
 Ma ne meus quiet va hunan guelet
 Ar pez so gueneomp discleriet.
 Ar Sant o clevet o leou,
 Da voëla var o fec'hejou
 En desert rac-tal a yas;
 Mæs Doue souden er vengeas:
 Ar c'henta fals test un nosvez
 Devet e voa hac e dieguez.
 An eil, ur gal eguis gant chas
 Bete e ivinou en debras.
 An trede o velet quement-se
 Goulen a ras pardon oc'h Doue,
 Quement e vouelas e bec'het,
 Ma collas buan ar guelet.
 Chetu ar fin eus al leou
 A ras an tri dest-se e gaou
 Enep Doue, ar virionez
 Hac un den leun a fantelez.

An Toueur.

Me gare e clesse quement-man

Quement fals test so er vro-man,
 Pe e zaent tout d'ar Galeou
 Ma ne zeont quet gant an diaoulou
 Pardon, va Zar, d'am goal beden
 Ar guella procez endoa den
 A gollis daou so pe tri bloas
 Gant testou faos evel Judas.

Ar Missioner.

Continuomp hor c'honferanç
 Ha lesomp breman ar vengeance.

An Toueur.

Disqueusit eta ar pec'het
 A ran hep gaou o touët.

Ar Missioner.

M'en disqueuso, chetu ma ræson,
 Clevit-hi e peoc'h, ma mignon,
 Aon emeus c'hoas na douac'h,
 Hac er vech-se pell em guelac'h.

An Toueur.

Me ferro quantoc'h va guenou
 Evit divoal dioc'h va leou.

Ar Missioner.

Evelse e tleffac'h ober
 Pa en em fantit e coler.

Goulen a rit pelec'h emma
 Ar pec'h et bras a reprenan,
 En ul le oc'heus prononcet
 Hep domach hac hep gaou ebet?
 Disenori a rit Doue
 Pa c'houlennit e Vajeste,
 Da rei testeni da un dra
 Quen alies an distera.
 Petra songeac'h-u a un den
 Ma vele ar Roue o tremen
 A lavarfe dezan. Autrou,
 Aman hon eus distachou,
 Var quement-se emmaomp e disput
 Me ho servicher, ha va Zat.
 Antrit, mar plich gueneoc'h en ti
 Clevit va ræson o hini.
 Ne quet guir e veac'h quemeret
 E vit un den disquiantet,
 Pe taolet ebars er prison
 Da ober deoc'h entent ræson?
 O pe manquet sur a respet
 D'ar Roue pa oc'heus parlantet
 E vit e bidi da veza
 Barnour var an traou distera.

N'eus quet a Roue er bet-ma
Oc'h Doue da gomparacha
E Vajeste so infinit,
Breman ho pec'het a velit.

An Touneur.

Mut er veich man ezon rentet,
Peur e vin-me convertisset?

Ar Missioner.

Ar prison a verit un den
A zeu hep respet da c'houlen
Oc'h ar Roue distachachou,
Ha ne verit quet ar flammou
Eus a dan an Eternite
Nep a offanç ur Vajeste
Quer bras ha quen dign a respet
Evel ar mæstr eus an oll bet?

An Touneur.

Mæs, va Zat, ar C'hatequis
A zisqueur ebars en Ilis,
A lavar ur goms so control
D'ar pezh a livirit-u oll.

*Un Doue hepquen a adori
Ha dreist pep tra oll a guiri.
Hep gaou e Ano na doüi quet*

Nac ivez netra eus ar bet.

Ar Missioner.

N'ousoc'h quet ho Courc'hemenou
Ret eo ho cass d'ar C'hatechismou
Nequet hep gaou a leverer,
Hep c'aus ezeo, pe en em drompler.
Evel-se, ma map, eo expliquet
Ho pet fonch, gant an Doctoret.

An Toueur.

Ancounac'het e voa guene
Ar pezh a zisqueur da vugale.
Me vel breman ar virionez
E tle Cristen ha Cristenes
Cos pe yaouanc mont a vechou
Da glevet ar C'hatechismou.
Dre ho madelez un histor
A lacai c'hoas gvel em memor
Pebes danger so o touet
N'eus fors pebes le a so gret.

Ar Missioner.

Chetu aman an terripla
Ameus c'hoas clevet er bet-ma.
Un toueur a voa henvel ousoc'h
Martese un nebeut coupaploc'h.

Ur map endoa, c'hui n'oc'hus quet
 Mæs c'hui so goard da vinoret.
 Unan dreist pep tra oll a guirit ;
 Oc'h enes , mignon , dioallit.

An Toueur.

Leun eo a squianr hac a speret
 N'endeus quet pēp bloas tremenet.

Ar Missioner.

En oat-se e voa map an toueur ,
 Un deves, n'eus fors da ped heur ,
 Goude m'en devoa debret mat
 Hac evet lot ur vouteillat ,
 E commanças e ganaouen
 A vouie guel evit e beden.
 Al leou horripla a lavare :
 E Dat leis e goff a hoarze ,
 E vap ganta a voa quemeret
 Etre e zaouarn da lamet ,
 Poquet a re alies d'e vabic ,
 Pebes , emezan , diaoullic ,
 Ma ne voa quet , e voa fouden ,
 Rac n'er guelas mui biquen.
 A dre e zaouarn e voa tennet ,
 Gant an diaoul diframet ,

Er c'hallas ganta en un tu ,
 Petra breman a songit-u ?

An Touneur.

Songéal a ran e meur a dra
 A dleffe ober din crena ,
 Va grec , va merc'h , va minoret,
 Sujet int ivez da douet ,
 Ha din-me epquen e tlean tamal
 Pe ouspenn c'hoas d'ar re all.

Ar Missioner.

Me vel e quirit an histor ,
 Disquit houma dindan cor ,
 Guelet a reot da biou tamal
 Deoas'h pe d'o crec pe da re all.

An Touneur.

Aon emeus da vea condaunet
 Oc'h histor pa embezo clevet.

Ar Missioner.

O prefec ur vech er C'horais ,
 N'eus quet pell ac'han e quivis
 Ur potric bihan voar dro c'huec'h
 bloa ,

Ha me da c'houlen diganta ,
 Ha c'hui voar ho Catechis ?

Ne zean

Ne zean quet, emean, d'an Ilis,
 Bepret gant ar faout e vezan
 Evel se netra ne zesean.
 Pet Doue so, a c'hui a oar ?
 Quen nebeut evel va c'hoar.
 Pe hano a rer cus ho tat ?
 An diaoul bras, emean, va Z at.
 Hac ho mam, pe ano eo ?
 An diaoulez eo e ano.
 Va zat a lavar quement-se
 Bepret d'am mam, hac hi ive
 D'am zat e lavar e ano,
 Piou o ene guel evito ?
 Map an diaoul oc'h evel-se ?
 Hac a glevan quasi bemde.
 Deus, va map, deus d'ar Presbital
 Gueneme breman, deus rac tal,
 Ar Person a allo lavarret
 E Gayer pa endo lennet,
 Pe ano oc'h, ho tat, ho mam,
 Pere ne dint quet tut divlam.
 Morbie, emean, ne zin quer
 Da di ar Person da vea cannet ;
 En de all cals em scandalas

Gant potret all pa em c'hlevas,
 Me voar pe ano a roas din
 Hanvet voan ganta Sarazin.
 Goulen a ris piou voa an tat,
 Piou voa ar vam da ur feurt map?
 Toueurien bras, eme an oll,
 A lequeomp tout er memes roll;
 Leun eo an ti a leou Doue,
 A ra tat, mam ha bugale.
 Hac aon bras hon eus na goueso
 Un deis bennac ar foeltr varno,
 Pe na zint gant an drouc-speret
 Pa eo ganto quellies galvet.

An Toueur.

Cant mil mallos din mar touan
 Biquen mui goude quement-man.

Ar Missioner.

Chetu c'hui c'hoas o touet
 Dre ho mallosou milliguet.

An Toueur.

Mæs penaus eta a rin-me
 Evit biquen ne rin a le,
 Ret eo difoeltra va guenou
 Evit ampech va oll leou.

Ar Missioner.

Lefit ar foeltr ha difoeltra ,
 Comfou int ne dalont netra
 Nemet da offanfi Doue ,
 Ha ganto dauni oc'h ene.

An Toueur.

Pa oc'heus , va Zat , ar vadelez
 Da regli erfat va buhez ,
 C'hoas un dra a ra scrupul din ,
 Ma ne de mat , e tiouallin.
 Custum ameus da lavaret
 Lies map-cast d'am minoret.

Ar Missioner.

Ur pec'het eo, va map, ar goms-se
 Evel ma eo quemant le
 Oc'heus gret hirio dirazon
 Hac odeus gret poan d'am c'halon.
 Un dra infam a livirit
 N'eus fors oc'h piou e parlantit ;
 Ar map ha c'hoas mui ar vam ,
 Petra bennac e ve divlam ,
 Dre ho coms a difenorit ;
 Chetu un histor aman, cclaouit ;
 E vit anaout ho ftoni ,

Ha tadou so meur a hini ,
 A lavar quellies ha bemde
 Ar goal goms-se d'o bugale.
 E coler e voa un tat sot
 Oc'h e vap ne voa quet diot ,
 A souffras gant patientet
 Bete ma teuas da velet
 E dat o vont d'ar fagoden ,
 Ar potr a guemeras anquen ,
 Ha buhan er meas a redas
 E dat var e lerc'h gant ur vas ,
 Ar map a voa scaonoc'h a droat
 A rede quel evit e dat ;
 Ar c'hos toueur o c'huanada
 A gommanças er fin da squisa ,
 Hac o stlapa var lerc'h ar vas ,
 Ar goal goms-man a lavaras.
 Que, map-cast, gant an drouc-
 speret ,
 Pa ne dout quet guene attrapet.
 Ar potr a guemeras ar vas
 Hic evellen a barlantas
 D'ho cortos me chomo brema
 Ha mar tostait, d'ho frotta ;

Map-cast a livirit din-me ;
 Pea a reot sur ar goms-se.
 C'hui ne doc'h quet eta va zat
 Ha va mam ne quet ur c'hrec vat,
 Pa n'omp querent na mignonet
 Ne dlean mui deoc'h a respet.
 Avoalc'h eo ; tostait den cos
 Da goufquet czeot quent an nos.
 Me ya quement d'ho pasata
 M'ho tistroin var ar guella,
 Ma leverot avoalc'h, va map,
 Goal ganna a rit, ho tat,
 Ha ma anevcot ivez va mam
 Evit ur vrec fur ha divlam.
 An toueur cos o caout cals aon,
 A gommanças goulen pardon,
 Anaout a ras e fotoni,
 Mignon d'e vap e teuas d'an ti ;
 Eleac'h mont c'hoas d'ar fagoden
 D'e vap e clasq ur grampoesen,
 Quemer, emean, tec'heus speret,
 Dommach eo n'out eat da Velec.

An Toueur.

Squiant sur en doa ar potr-se,

Hoguen, va Zat, c'hoas me gare
 Coufout hac en a fo pec'het
 O touet var lerc'h al loenet ;
 O rei a ran d'an drouc-speret
 D'ar barravel, quement clenvet
 Ar gounar ha quement drouc fo
 A zefiran bemde ganto.

Ar Missioner.

Ar goler a ra deoc'h touet,
 Cridit, va map, eo ur pc'het.
 Hac ar c'homsou a livirit
 Ne dalont netra, divoallit.

An Toueur.

Un histor c'hoas var ar poent, man
 Da zigaç fonch din anezan.

Ar Missioner.

Un den eveldoc'h toucur bras
 D'an drouc-speret e lon a roas
 O flapa outi ur pezh mæn
 A yas rac-tal da squei e fen.
 Al lon d'an douar a gouefas
 Hac en ur momet a varvas ;
 An toueur en em deploras
 Ha gant glac'har bras a vouele

Mæs un den a voa var ar plaç

D'e gonfoli a lavaras :

Perac , emean , quement lenva ,

Nequet arruet an drouc brassa ,

N'ec'heus te quet breman roet

Da lon paour d'an drouc-speret ?

Nequet eat gantan , les da anquen

Chom a re ganit quic ha croc'hen.

An Toueur.

Bepret oc'heus ar virionez ,

Ha guencomp e chom follentez ;

Rac se , va Zat , ar moyenou

Da guitat erfat va leou.

Ar Missioner.

Souden deoc'h me o lavaro ,

Ema en affer , ha c'hui sento ?

An Toueur.

Morto buquen ne zin ac'han ,

Oufoc'h , va Zat , ma na sentan.

Ar Missioner.

Ret eo din va hunan parlant ,

En ho pec'het oc'h re constant.

Evit petra , mortobuquen ,

N'illit-u quet en em zifen ,

Ha respont din hep le ebet ,
 Hoc'h avis , va Zet , a vezo gret.

An Touneur.

Ne fenchin quet quen na vin mut.

Ar Missioner.

Eo , va map quæz , me eno tut
 Odeus fenchet evel ma reot ,
 Mar grit tout ar pez a gleffot.
 Da guenta e tleit consideri
 Dirac Imach ar Grucifi ,
 E crucifiit hor Salver
 Quellies ma teuit da ober
 Unan al leou-se hep ræson
 Grit var quement-man Oræson
 Dioc'h an nos ha dioc'h ar mintia
 Stouet bepret var ho taoulin ,
 Er fin d'an douar e pocot
 Ha da Zoue e prometot
 E reot quellies quement-se
 Ma teuet da ober ur goal le.
 Nequet possubl sur na fenchac'h
 Cals pe nebeudic mar bouchac'h
 Quellies d'an douar a goste
 Evel m'ho pezo gret a le.

An Touneur.

An Toueur.

Mæs scrupul am bezo , va Zat ;
 Rac aon na deuen da ancounchat.

Ar Missioner.

Evit caout sonch a bep pec'het ,
 Mat e vezo deoc'h quemeret
 Ur mæn ebars ho codellou
 Quellies ha ma reot ho leou.

An Toueur.

Mar de ret da bep le laquat ,
 Bras fouden e veo va fac'hat.
 Me gred e vezin sur pouner
 Mar don laquet er balancier.
 Va Zat paour, n'en em fachit quet
 Er vech-man n'emeus quet touet ;
 Mæs permetit c'hoas da c'houlen
 Rac aon goude n'ambe anquen ,
 Ar poes just eus a bep mean
 Da guemeret a bromettan.

Ar Missioner.

Dre un histor me a responto ;
 Ha goude-se c'hui a velo
 Ar pez a so mat da ober
 Evit na vesot mui touer.

Da un den eveldoc'h boaset
 Ar memes avis a voa roet,
 Hep barguign ebet e laquas
 Ar mæn da guenta a gavas
 Bras pe bian o c'hemere
 Herves var an hent o c'have.
 Quent pen eis de adeo d'al leou
 A voa e vrasia pec'hejou.
 Mar imitit an exempl-ma,
 Sench a reot buhan evelta.

An Touneur.

Aon ameus rac va divis quer.

Ar Missioner.

Liquit eta quellies diner
 Evel m'o pezo gret a le,
 Ha rei a reot quement-se
 Da ur paour e sin ho tevez
 Evit ma senchot ho puhez.

An Touneur.

N'oun quer, va Zat, quer pinvidic,
 Aon ambe da veza prodig.

Ar Missioner.

Poquit eta quellies d'an douar
 Quenta ma ellot gant glac'har

Ne gueffot quet a remejou
O tifenno guell dioc'h leou.

Evit savetai oc'h ene

Ret eo an eil pe eguile.

e aon cmeus ne veot daunet,
e toueur e vesot bepret,

An Toueur.

D'an diveza guech m'en toue

Me rai un dra a guement-se.

Ar Missioner.

Mar dalc'hit mat d'ho promessa,

Gret oc'heus al le diveza ;

Mæs abalamour m'oc'heus touet,

Hac emboa ouzoc'h diffennet,

Liquit ar mæn-ma en ho sac'h

Rac aon c'hoas na douac'h,

Ha scoit cre var poul ho calon

O c'houlen oc'h Doue pardon,

Hac ar c'hraç ne goueffot quet

Birviquen mui en ho pec'het.

An Toueur.

Er façon-man sur me sencho,

Pe an diaoul cals em zento.

Ar Missioner.

Perac an diaoul lavaret.

An Touneur.

N'emeus quet er vech-man touët,

Ar Missioner.

An ano-se ne dal netra ,

Ano hon adverfour brassa.

C'hoas un diner pe ar mæn-man

M'ho pezo coun a guement-man.

An Touneur.

Me gred ives e chlcanit :

Mæs ne deus fors , mar va senchit.

Ar Missioner.

Ne glascañ nemet quement-se ,

Ha m'er grai gant sicour Doue ,

Mar grit ar pez a livirin.

An Touneur.

Cousto pe gousto sur e rin.

Ar Missioner.

Ret eo , va map , mont da gofes

Divech er mis ne quet re lies ,

Dreist pep tra er gommançamant,

Ha guelet a reot senchamant.

Mar dit evellen da gofes

Gant un den leun a santeles ,

Ne vanco quet da lavaret
 E vo mat deoc'h mont d'ar Retret,
 Evit commanç da repara
 Ur vuhez evel ho hini ;
 Eno e ellot a ben da ben
 Cofes erfat gant guir anquen
 An oll leou se malcür us
 A rent, allas ! quen douetus
 Quement Sacramant oc'heus bet
 Abaoue ma oc'h d'al leou fujet ;
 Clevet a reot meur a Sermon
 A doucho ivez cals ho calon
 Evit dioal dioc'h ur pec'het,
 A ve caus deoc'h da veza daunet.

An Toueur-

En de all fur me a gleve
 Un den so amefec din-me,
 Am gourdroufas terrubl cruel
 Oc'h ober din erfat e guentel
 En doa desquet en ur Retret
 A nevez enni e voa bet.
 Penn touffec emboa lavaret
 Da unan eus va minoret :
 Penaüs, emezan, ur C'hriften ;

Goude ma eo badet e benn ;
 Pen al lon vila a hanvit ;
 N'ousoc'h quet petra livirit ;
 An den goude ar Badiant ,
 It d'ar Retret da glasq squiant ;
 Map ezeo d'an Tat Eternel ,
 Hac un Templ d'ar Speret Santel ;
 Ur Breur d'hor Salver biniguet ,
 Ha touffec guencoc'h eo hanvet ?
 C'hoant bras emeus a c'houdevez
 Da vont d'ar Retret un devez.

Ar Missioner.

Ar c'henta guell. Souden me gred
 E commanç ur Retret goaset ;
 Na ziferit quet davantach
 Pa eo ho prassa avantach.

Adeo , va map , ni en em velo
 Da ben ur mis mardomp e beo ,
 Da ober va c'hest neuse e teuin ,
 Curius oun petra reot-hu din ?

An Toueur.

Quement pez mæn a veo destumet
 Gant ho toueur convertisset ,
 Ha quellies a bez c'huec'h reall ,

Rac em plaç e caffot un all.
 Mill bennos d'an heur ha momet
 Ma emeus hirio o cavet.

Ar Missioner.

Mar d'oc'h ar pez a bromettit
 Ne rin quet gueneoc'h cals profit
 Nac eus a aour nac eus a arc'hant;
 Mæs aoalc'h e vezin contant,
 Mar ho cavan convertisset,
 Ha n'ho clevin mui o touet.
 Evel arre all c'hui a roi
 Hervez Doue pe ho faltast,
 Nebeut pe cals, n'eus fors petra;
 Mui a le, chetu ar guella.

F I N.

*Da Zoue ra vezo menleudi
 Ha d'e Vam ar Verc'hes Vari.*

Handwritten text, likely bleed-through from the reverse side of the page. The text is mirrored and difficult to decipher due to the quality of the scan and the nature of the bleed-through.

Handwritten text at the bottom of the page, possibly a signature or a date, also appearing to be bleed-through or a separate entry.